

468

Eur Fleurennic
 Ginniquet gant ur Breiziad
 Evit mesca er gurunen barzonec
 en enor La Tour-d'Auvergn.
 Mae 1841.

(397)

An oll Barzed a Franç, a deuer da c'hervel
 D'ober ur gurunen da harros Breiz-Izel;
 Ni dreist-oll, ni Breizis, a dle dont da essât
 Dastum hor fleurennic evit hor c'henvroat.

Ja, ni, Bretonet,
 A dle ive donet
 Da ginnig hor fleuren
 D'orni e gurunen.

Peb Breiziad da bini e zeo an enor qer,
 A zescas var barlen e vam vad ha tener
 Uiez e viô quer a Vreiz, a zanto levenez
 Pa gomzet a harros qer eurus Karahes.
 La Tour d'Auvergn neo get harros Breiz hep muiqer:
 Harros Franç eo ive hac e vo da vigen;
 E vuez pen-da-ben voe consacret d'ar vad,
 Bepret e voe leal, courajus, deread.

(398)

En e yaouanqis voe
 Occupet nos ha de
 Da ellout dont habil
 Ha da verza util.

Achuet e studi, e sant en e galon
 Eur gourach dign en oll demeus eur güir Breton.
 Ant ar brezellerien er peurgarq a charrou,
 Hac e red, laouen bras, da quemer an armou.

Er vicher a zoudard,
 Evel un eil Bayard,
 E voe, e peb amzer,
 D'e gamaradet scoier.

Atao e voe quelot, bars er brassa carnach,

469

(399)

Evel un den vaillant ha carquet a gourach;
 Mes, goude ar gombat, leun a humanité,
 Er rod d'ar re vlesset da rei sicour dezé.
 Mes ar seiz varnuguent a even, mil eiz cant,
 Pa voa o combati gant ur gourach ardant,
 Ur hulan en treuzas, sivoas! gant un tol lanç,
 Hac e varv gant enor genta grenadier Franç...

Daou-ugent vloas a zo
 M'eo hon harros maro
 En grenadier vaillant
 E penn e regiment.

Goude eur c'heit amzer ~~anfan~~ e voe rentet
 Ar peyz vit harros Breiz voa pell zo regetet;
 Er guer ma voe ganet, er guer a Garahes,
 Vo eur solemnite ha na veljomp james;
 Statu La Tour-d' Auvergn a vo eno savet
 Gant ul lid burzudus a rei d'an oll cavet
 Eur joa eus ar vrassa, en eur velet penos
 Vo rentet en deiz-se enor d'ar giir harros.

Ni, dreist oll, Bretonet,
 A dle bremä donet
 Da rentä hon hommach
 D'ar scoier eus ar gourach.

(400)

La Tour-d' Auvergn a voe hed e rën burzudus,
 Den leal, den habil, Breton mad, courajus;
 Pa glêvimp comz outän, bezomp atao memor
 Ezeo, carquet a c'hloar, marv er c'hamp a enor.
 Ah! bezomp oll fier m'eo en hon touez ganet
 An den vaillant a vo gant ar barzed canet!
 Ha conserwomp ennomp atao an esperanç
 Da verza dign demeus genta grenadier Franç.

A. Lédan.

(Vol. IV, p. 397-400.)